

Degemer mat e bed BREIZHIT !

Ur c'hoari gant goulennoù farsus ha reolennoù simpl eo Breizhit

1. Ar seurtoù pakadoù kartennoù

A-raok kregiñ gant ar c'hoari, dalc'hit soñj eus an tri doare fichennoù disheñvel a zo :
60 kartenn evit an dud deuet • 60 kartenn evit an dud yaouank • 120 kartenn fotoioù

War ar fichennoù evit an dud deuet ez eus 5 tem disheñvel war bep kartenn :

- deskadurezh dre-vras
- goulennaoueg diwar-benn Breizh
- ar mimoù
- brezhoneg
- an tem « skañvoc'h »

War ar fichennoù evit an dud yaouank ez eus 5 tem disheñvel war bep kartenn :

- deskadurezh dre-vras
- goulennaoueg diwar-benn Breizh
- ar mimoù
- an natur
- an tem « skañvoc'h »

Evit an dud deuet ken koulz hag evit an dud yaouank eo ar fichennoù gant fotoioù.

2. Penaos c'hoari

E-barzh ar voest ez eus 9 miltamm a ziskouez ar broioù e Breizh. Pep c'hoarier pe pep skipailh a zibab ur miltamm, a laka anezhañ dirazañ hag a denn ar pezhioù anezhañ.

Talilit an diñs. Ma rit 1, respontit d'an tem « deskadurezh dre-vras », ma rit 2, respontit d'an tem « goulennaoueg diwar-benn Breizh », hag all...

Ma rit 6 e tleit respont d'ur goulenn gant ur foto.

Ma vez respontet mat e c'hellit lakaat unan eus an 9 bro war ho miltamm. Pep c'hoarier (pe pep skipailh)

a daol an diñs pep hini d'e dro. Ar skipailh kentañ a echu ar miltamm a c'hounez ar c'hoari.

Gant ar c'hoari Breizhit ez a buan ha posupl eo c'hoari meur a wech.

3. Tem ispisial : ar mim

Mat eo an tem-mañ ma c'hoariit dre skipailhoù. Ezhomm ho po un eurier-traezh pe n'eus forzh petra all. Talilit an diñs. Ma vez graet 3 e tleit ober ur mim (ur vunutenn). Hep komz, hep kaozeal, o vimañ hepken. Ma vez kavet ar respont gant ho skipailh e c'hounezit ur vro da lakaat war ho miltamm.

4. Evit ho plijadur ez eus 3 reolenn c'hoari disheñvel

Reolenn 1 : 1 enep 1

C'hwi zo daou hag e tibabit c'hoari an eil a-enep egile (c'hoarier e vo hep ar mimoù). Ar c'hoarier all a savo ar goulennoù ouzhoc'h.

Reolenn 2 : dre skipailhoù

Savit 2 skipailh. Posupl e vo c'hoari gant ar mimoù. Ar skipailh all a savo ar goulennoù.

Reolenn 3 : tout an dud a-enep ar c'hoari

Ur rener a vo ha ne c'hoario ket met sevel a raio ar goulennoù. N'eus nemet ur skipailh. Ma respontit mat e c'hellit lakaat ur vro war ho miltamm. Ma respontit fall eo ar rener a lakaio ur vro war e miltamm. Muioc'h a respontoù mat pe faos a rooc'h ?

5. Goulennoù evit ar re yaouank

Etre 8 ha 12 vloaz, hervez live brezhoneg pep hini. Aliañ a reomp c'hoari gant sikour un pe meur a zen vras.

